

## KIS-871 – Ar sinalunioù

(YVT – 12 03 06)

### 1. AR SINALUNIOÙ

N'eo ket diouzh ul lizherenneg eo e skriver sinaeg. C'hoarvezout a ra ar skritur eus **arouezioù** (Gl. *signes*) a reer **sinalunioù** (Gl. *sinogrammes*) pe **lunioù** (Gl. *caractères*)<sup>1</sup>.

Digemm eo al lunioù sinaek, dezho bep a stumm, bep a ster, bep a soniad (a vouezhiadenn) = an 3 S.

Gouzout lenn sinaeg zo naouaat al lunioù hag anavezout o stumm, o ster, o soniad.

War-dro 40 000 sinalun zo (60 000 pa lakaer e-barzh an eilstummoù, ar re dispredet hag aet da get).

Etre 1 500 ha 2 000 anezho zo ezhomm da lenn ar c'hazetennoù hag al lennegezh kempred...

Dalc'het en ur c'horreenn garrezek derc'hek e rank bezañ pep sinalun.

An **tresad** (Gl. *trait*) an hini eo zo unanenn ziazez ar sinalun. Eizh tresad pennañ zo.

### 2. AR RIZHOÙ SINALUNIOÙ

Lies **elfenn gevregat** (Gl. *éléments graphiques*) a ya d'ober al lunioù.

D'o eñvoriñ e ranker gouzout o **digenaozañ** (Gl. *décomposer*).

---

<sup>1</sup> [GE – 04 03 06] Br. *lun*, Kb. *llun* amprestet gant aozerion ar *Sketla*, a zeu hervez LOTH eus Kt. *\*lounorios*, *\*lounarios* (RC 30 137), "oberour skeudenoù, oberour arouezintioù brezel" (hervez MORDIERN, NOTK 291 n.). Gwriziennet mat er yezh kempred eo *lun*. Degaset en deus gantañ un darn vat eus lieskemeradezh ar ger kembraek. Digor eo skalfad e zurchadurioù ster, ennañ danvez evit ar skritell a glaskez sevel ; ouzhpenn se, ent sonel, ez eo *lun* aes da gediañ. An anvad *sinalun* zo diforc'hell ent sterel ha mat ent sonel.

Ur sinalun kalz a dresadoù ennañ ned eo ket unan « diaes » diouzh ret enta.

An elfennoù kevregat a c'haller renkañ e pevar rummad :

**2-a. AN TRESLUNIOÙ** (Gl. *pictogrammes*)

Derc'hennadurioù stilekaet pe argelekaet (Gl. *symbolisées*) a 'r pezh a weler. Sk. : ar wezenn, ar menez, an heol, al loar...

**2-b. AR C'HEALLUNIOÙ** (Gl. *idéogrammes*)

Derc'hennadurioù, danzeadoù, meizadoù, dre gediañ, kenaozañ elfennoù kevregat eeun (treslunioù enta). Sk. :

ar c'hoad = div wezenn en ur gichen

ar gouloù = an heol hag al loar en ur gichen

an divarvezh = an den hag ar menez en ur gichen.

**2-c. AR SONGEALLUNIOÙ** (Gl. *idéophonogrammes*)

Savet diwar ur bennrann dresluniat, pe **alc'houez** (Gl. *clé*), hag un eil elfenn a ro un alberz eus distagadur an hollad (soniad). Sk. :

gwez skav-gwrac'h-Kanada (= *feng*) a vez kenaozet gant :

- treslun ar wezenn ('alc'houez' al lun)

- ul lun '*feng*' e soniad (lun an avel = *feng*)

gwez-pin (= *song*) a vez kenaozet gant :

- treslun ar wezenn

- ul lun '*gong*' e soniad (lun 'boutin' = *gong*).

Dav eo gouzout e c'hoarvez an darn vrasañ a 'r sinalunioù eus songeallunioù (80 %).

**2-d. AN AMPRESTOÙ**

Amprest ul lun resis en askont d'e heñvelsoniadezh gant anvad ur meizad diaes da zerc'hennañ. Sk. :

Kevatal sinaek Br. *c'hoantout* a vez distaget [yao] evel ar c'hevatal eus Br. *dargreiz*. Lakaet e voe al lun sinaek a dalveze "dargreiz" da dalvezout evit "c'hoantout". Setu ma oant heñvelskriv en abeg d'o heñvelsoniadezh. Diwezhatoc'h, d'o hennadiñ, e voe roet d'ar ger distaget [yao] "dargreiz" alc'houez ar "c'hig".

